



## SOUDARDET BREIZ.

# BREZEL AR RUSSI.

Abaoue pell amzer, Nicolas, Impalaër ar Russi, den cruel hac orgouillus e falle dean bea mestr' var Jerusalem, evit gallout miret eus ar gristenien da vont d'a guær santel da visita be hor Salver Jesus-Christ. C'hoant en devoa memeus da vea Pap e Jerusalem, ha da ren, evel un tyrant var ar bed universel; mes Doue, dirac pehini ar Rouanet, a ze tud evel ar re all, a deuas pront da blega he ouerg...

Ar Franç, hor bro gaër, pehini e deus a viscoas, beillet var Jerusalem ha difennet ar gristenien eus an Asii ha broïou sao-eol, a roas sclêr da entent da Impalaër ar Russi, penos n'en devoa perz ebet e Jerusalem. An Impalaër barbar, dallet gant an ourgouil, a reas ar scouarn vouzar hac o sonjal dont a ben eus e dôl, e cassas un arme da guær Sinop, en Asii, gant urs da zistruja ker ha da vassacri an oll dud, coz na yaouank, goaset ha merc'hed, ar vugale vian, e'hoas eus ar vron, ne voant ket bed espernet.

Ractal ar Franç ha Bro-Sôz, a-hunan gant ar Piemont hac an Turki, a savas un arme vras meurbet; e pen an arme-ze, an terrupla a zo be gouelet, a voa laket potret Breiz-Izel, tud a feis hac a galon, m'ar deus bet biscoas var an douar. Abars pellaat deus ho bro, hint bet e Remengol, o lavaret kenavo d'ho fatronès gallou-



du, da vam guer ar Vretonet, an Itron-Varia Remed-oll, brassa Santès a zo er bed; teir goueach, ho deus grêt, diarc'hen hac e corf ho rochedou an dro d'he ilis miraculus, poket o deus, gant carante. d'he zreid ha da relegou ar Sænt bras a zo eno, gret ho deus an dro d'an auter; biaiguet eo bet dezo medalen an Itron-Varia Remengol, hen laket o deus en ho c'herc'hen; mallos brema d'ar Russianet, pa lavaro potret Breis : *tor he ben!!!....*

*Terribiles sunt Bretones, quando dicunt : tor he ben!!!.....* a lavare Cesar gouechal.

E mis even, er bloavès 1853, goude beza treuzet ar môr dû, arme Franç a zizambarkas er Russi, en eur c'hontre, hanvet Crime; ractal e commanças an emgan; diveur goude e voa gouneet victor Alma, hac an douar, rû gant ar goat a voa goloet a Russianet maro.

Neuse e sortias, ive, a bors Brest, un niver bras a vatimanchou, evit cass un arme martolodet d'an nord, er môr Baltik, dirac Petersbourg, kær capital ar Russi; goude bea entanet ha distrujet ar batimanchou hac ar c'hæriou Russ, var ho c'hent, en em gavjont dirac Bomarsund, castel bras, carguet a ganoliou, pehini a zifenne råd Petersbourg. Da vouël ar Verc'hès, ar bemzec a vis ëost, an taboulinou hac ar musik a zone skiltrus var batimanchou Franç, renket en dro da Vomarsund; eur bælec, var bep batimant, a lavare an oferen; ar vartolodet, daoulinet var ar pont, a bede Doue hac an Itron-Varia Remed-oll; n'ac a dad, n'ac a vam, daoulinet, ive, en deis-ze, en ilis Remengol, a vouele dourec hac a bede evit ho bugale, evit ar vartolodet kès!!!....

Da eunnec heur, an amiral a ordrenas sevel, var an huella guern, pavillon ar brezel ha digueri an tân; actal, ar c'hanoliou a strakas, ar bolejou a goue var ar Russianet, evel ar grisil, var an douar, e mis dû; un heur goude, da greis de, castel bras Bomarsund ne



voa nemet poultr' ha ludu..... Dre eur miracl ar brassa, batimanchou Franç, n'ho doa collet nemet pemp pe c'houec'h den.

Impalaër ar Russi, attaket a bep tu, a savas en e oll stadou, un arme vras evit difen Sebastopol, enna kær a voa biscoas gouelet; daouzec mil pès canol a voa renket tro var dro, var mogueriou kær, hac a denne, noz deis var hor soudardet, pere, dindan ar glao, an avel, an erc'h hac ar scorn, eis kant leo deus ho bro, a ranke ober henchou dindan an douar evit tostaat eus kær. Doue ho soutene; aliès bodenet assambles dindan an tinellou brezel e canent, a voues huel, guers ho mam vad, an Itron-Varia Remengol, pehini a lake e calon he bugale, nerz, feis hac enor. Epad daou vloas, ho deus bet gouneet var ar Russianet, calc a victoriou, ispicial e Balaklava, Inkerman, Traktir; laket an tân e Odessa, e Kinburn hac e meur a guær all; var ar môr, batimanchou ar Russi a voa oll distrujet gant martolodet Breis.

Goude kement a victoriou gounezet gant hon armeou, dorn Doue a deuas da skoï Impalaër ar Russi, pehini dre he ourgouil a voa kiriec a oll maleuriou ar brezel, hac en devoa gret scuilla kemend a voad hac a zaëlou; mervel a reas en disesper, dre eur maro subit, hac, en eur vervel, e couezas, var e ben, mallos Doue ha mallos an dud. He vap Alexandr' a gontinuas ar bresel.

Tostaat a re an devez bras, an devez terrubl..... An eis a vis Guengolo, 1855, devez gouel guinivelez ar Verc'hès, evel ma roudennas an eol en ên, eur bælec a lavaras an oferen, var ar blenen, e creis an arme; ar vartolodet a glevas ive an oferen var ho batimanchou.

D'an tôl a greis de an taboulinou a zone, ar c'hesec a c'hrizinke, ar c'hanoliou a dostee, ar zoudardet en em renke, en dro da Sebastopol; an emgan bras a ie da gomanc, seis cant mil den a voa eno prest d'en em laza... Neuze eunan a botret Breis, a lampas e pen he regi-



mant, hac he gleze noas, savet en ær : « Va mignonet,  
« emezan, Sebastopol a vo, hirio, deomp, Æl Breis-  
« Izel hac ar Sænt bras eus hor bro a bedo evidomp,  
« patro ar Vretonet hon assisto..... Hirio, hon tud,  
« daoulinet en ilis sacr' Remengol, a bed anezi evi-  
« domp..... Bezomp potret vaillant, potret a galon.....  
« Pa vemp distro d'ar guær, e zaimp oll d'he gouelet,  
« devez ar pardon bras..... Greomp sin ar groas gant  
« he medalen ha celebromp, hirio, he gouël a doltou  
« canol.....

« *'Nep a bed Guerc'hès Remengol,*  
« *Birviken ne dai da gol!!!..... »*

hac ar c'hanoliou a drouzas spountus, an douar a grene  
evel un deillen, bolç an ên a orgelle, an ëol a guze e  
sclerijen, biscoas ne voa bet eur seurt lac'hadec!!.....  
Ne veler nemet tân, moguet, tud varo, tud o vervel!...  
Ne glever nemet trous ar c'hanoliou!..... Ar boulejou a  
iude a bep tu, tro var dro da Sebastopol, ar goad a  
ruille, evel an dour, goude eur barrat arne!!... Epad  
ar brassa trubuil, eur sclerijen douç evel hini al loar,  
a ziskennas eus an ên..... Azeet var eur goumoulen ar-  
c'hante, an Itron-Varia Remed-oll a astenne e dorn  
santel hac a roe he benediction d'he bugale!!..... Eur  
youaden a joa a savas neuze, e toues an arme, unan a  
botret Breis, a biguas hac a blantas, ar c'henta, var  
mogueriou kær, baniel ar Franç en eur grial : « Gloar  
da Zoue!!... Gloar da vam ar Vretonet, an Itron-  
Varia Remed-oll!!!... » Mogueriou kær a gouezas.

An niver bian a Russianet beo, c'hoas e Sebasto-  
pol a gomeras an teac'h; da beder heur goude creis-  
de, hor soudardet a antreas e Sebastopol!!!..... Se-  
bastopol, ar gær grën ha terrubl ne voa mui nemet  
eur bern eskern, eur bern mein, kemesket gant ar  
goat ha corfou freguet an dud varo!!!.....

Da beder heur ive, en deis-ze, cleïer Remengol a



zone joaius, an Itron-Varia Remed-oll a voa laouen, moguet an esanç a save, gant pedennou ar Vretonet betec bolç an templ santel, eus a behini, evit renta graçou da Zoue e sortie eur brocession gaër. Caëroc'h c'hoas e voa d'ar bloas varlerc'h, 1856, pardon bras Remengol e toues ouspen triuguent mil pelerin, e veler martolodet ha soudardet Breis, distro eus ar brezel; deut hint a vandennou, da Remengol, darn diarc'hen, darn e corf ho rochedou; ho vad a zo treuzet gant ar boulejou hac an toliou sabren. Daëlou a joa a deu var ho daoulagad, o velet, c'hoas, ar vam vad ho difenne, e pad ar brezel; roi a reont dezi, evel eur merk eus ho c'harante, eur baniel var behini eo scrivet :

« Gloar, gloar bepret,  
« Da vam ar Vretonet,  
« An Itron-Varia Remed-oll  
« Hon difenne e Sebastopol!!!.... »

Ar vartolodet a zo laket er pen kenta, e procession ar miraclou, goude merc'het yaouank, guen evel aet, a zoug imach ar Verc'hès, var ho lerc'h, e teu relegou ar Verc'hès, ar famil Santel, an Ebestel, an Doctoret eus an ilis ha relegou ar Sænt bras a Vreis, douguet gant potret Kerne, Leon, Treguer ha Guenet; entrezo ha corf sant Silven digasset eus a Rôm da Remengol gant hon tad santel ar Pap, Pii nao, ha douguet neuze gant pevar bæleg, emedo ar soudardet gant ho baniel. Un niver bras a veleïen a c'heuille; an Autrou Sergent, Escop Kemper ha Leon a roe he venediction d'ar belerinet, deut a bel bro, d'an ilis miraculus da veuli ha da drugarecat ar Vam vad ha carantesus, dirac pehini, en amzer dremenet, hon tadou coz, en ho foaniou, a zo bet daoulinet, ha dirac pehini, ive, en amzer da zont, e taoulino ar re a zeuio var hon lerc'h, er bed-ma.



O velet ar soudardet, ar vartolodet, ar belerinet, o  
velet ar bursudou bras a ra Doue, en ilis miraculus an  
Itron-Varia Remengol, an dud a lavare, an daëlou en  
ho daoulagat :

« 'N'ep a bet Guerc'hès Remengol,  
« Birviken ne dai da goll!!!..... »

---

## Pelerinach Soudardet Breis en Ilis Remengol

DEVEZ AR PARDON BRAS,

DA ZUL AN DRINET, ER BLOAVEZ 1856.

---

Var ton : *Cantic ar Burete.*

---

### I. Ar Belerinach.

Salut, douar Breis-Izel,  
Va mam-bro an Arvor !  
Salut, bro an dud santel,  
Bro ar feiz, an enor!!!....  
Salut, bro ar Sænt brudet  
Bro ar soudardet vad,  
Gant ar Verc'hès sacr' caret  
Ha gant Doue hon tad!!!....



Potret yaouank, difunit,  
Difun, difun, Meder,  
Savit oll ha selaouit  
Ar ganouen seder  
A sao divar lein' crec'hen  
Ilis sacr' Remengol,  
D'ar c'houlz n'eus c'hoas savet den  
D'ar c'houlz ma kouesk an oll.

Piou é ar belerinet  
A velomp a bep tû,  
Dre ar veret daoulinet;  
Ha gante dillat rû?  
'N'ho zoës iniennou  
O deus bragueier bras  
Hac, en ær, dreist ho fennou  
Eur baniel rû-guen-glas.

Didostaomp' ta dese,  
Silaouomp ho c'homzou  
Hac e clefomp martese  
Darn eus ho fedennou;  
Daoust hac ar belerinet  
Deuet da Remengol  
Ne vefen ket soudardet,  
Bet e Sebastopol.

Cetu ar belerinet  
O sevel en ho za,  
Cetu hint en em stouet  
Da gana crënvoc'h c'hoa  
« Salud, bro ar Sænt brudet,  
« Bro ar soudardet vad,  
« Gant ar Verc'hès sacr' caret  
« Ha gant Doue hon tad!!!...»

Neuze ive ar botret  
Hac ar merc'het lirzin



Tostêt d'ar belerinet  
Dre c'hlisten ar mintin  
A vel er veret gant joa,  
A vel o luguerni  
Eur vedalen ar gaëra  
Var galon peb hini.

## II. Ar Vœu.

Aroc ma tistro an de  
Neus 'met eur c'houlaouen  
E creis templ santel ar fe  
O roi he sclerijen.  
Pa ve sioul he volsennou  
Ha sioul en dro dese  
Ecleo lent ar pedennou  
A drouz cren dindanne.

E c'harz treid sacr' au auter  
Pa zint oll daoulinet,  
E sao huel ha seder  
Peden ar soudardet;  
Tri'houte d'ho mam santel  
A ziskuel kalonec  
En eur sevel ho baniel  
Ho rochedou goadec

Gloar dec'h ho deus lavaret,  
Guerc'hès sacr' Remengol,  
Ar goad-ma hon deus skuillet  
Dirac Sebastopol,  
Pa goë 'kreis an tân rû  
Mil a glei, mil a zeo,  
Hon n'eus 'n'em voestet dec'hu  
Hac e zomp chomet beo.

Ho goude e sao pévar  
Soudard all mac'haignet,



Tri o deus collet eur c'har ,  
Eunan zo divrec'het :  
Var an dachen astennet  
Gant eur voled canol  
Ni hor boa en em voestet  
Da Verc'hès Remengol.

Neuze unan zo savet  
He beultrin disolo,  
Peder gouech eo bet freset  
Gant houarn ar biro :  
Ha be vech dirac an oll,  
Be vech c'hoas e toue  
Mont da Ilis Remengol  
Pa n'em gafje pare.

Me da ober eur pont tud  
Da dour Sebastopol  
'Voa sklapet e creis va brud  
En eur fos dòn da goll ,  
Eno koeas arauzon  
Tri regimant a bes ,  
Va 'hunan m'on en eston  
O vea deut er mes.

Ha n'hi , me ùn , a bevar  
A valeas dreistan ,  
'Vit mont da gas ar glac'har  
Da gær ar Russian ;  
Cetu ganen c'hoas scrifet  
Eul liser 'vit va zad  
Deus an ty am boa rincet  
Gant va zri gamarad.

Ha me e creis an tân rù  
Hac ar c'hurunou bras  
Pa voan cuzet a bep tu ,  
En eur vogueden c'hlas ,



Neuse me m'eus bet guelel  
Guerc'hès sacr' Remengol,  
O tifen hor soudardet  
Dirac Sebastopol !.....

Ha pa m'oa dec'h lavaret  
En eur distrei d'ar guer,  
E voa d'he gouel kemeret  
Tour Malakof ha kær,  
Hac emgan bras Inkerman  
Kollet de he gouel c'hoa  
Kollet gant ar Russian  
Kouls hac hini Alma.

Sonj hon heus e lavarjomp  
Neuze a voes huël  
Mari a voa ganeomp  
'Pad amzer ar bresel;  
Ractal darn a lavaras  
E teujemp assambles,  
Ama, de ar pardon bras,  
Da veuli ar Verc'hès.

Neuse' canjont, en eur voes,  
Gloar ha meuleudiou  
Hac e rojont d'ar Verc'hès  
Ho baniel a dri liou,  
Var bini e voa skrivet :  
E skritur ar c'haëra :  
« Mari, deus hon difennet,  
« Hac hon difenno c'hoa ! ! ! ! !..... »

### III. Ar Pardon.

Pa n'eus teir guech saludet  
An douarou kristen



E savet eol an Drindet  
Da sec'ha ar c'hlsen,  
Neuse ebars er c'hoajou  
Al labousset bian  
Cuset dindan an deillou  
'Ra ho feden, var gân.

Ema digor ar pardon  
'Vit ar belerinet.  
Ar zoudardet a galon  
Er bourg a zo chomet;  
Etoues ar bardonnerien  
A erru a bep tu  
M'aint 'vel e mesk ar melchen  
Ar bleun hac ar ros rû.

Ma veljec'h darn anezo  
Gant ho bragueier bras,  
Ha gant ho zurubannou  
Hac ho chupennou glas  
Ha var ho diouc'har stardet  
Gamachou gant eul las  
Ha plumachen ho bonet  
Koet var ho goug noas

E lavarjac'h : an dud-ze  
N'int ket divroidi.  
Rac ar bleo hir er mene  
Ha liou al lingeri  
Eb miken a ziffarant  
Al labourer douar  
Deus ar Zouavet vaillant  
Bet e mesk ar glac'har.

Deus toues ar bardonnerien,  
Er c'hœur d'an ofern bred  
E zint mesk ar veleïen  
Gant gloar dighemeret,



Ha nense ho calonou,  
Merc'hedigou lirzin  
A dridas, ha c'houi, mamou,  
'Bedas var ho taoulin.

E debes bras ar pardon  
Ve da guenta laket  
Ebars er brocession  
Diou renk martolodet  
Seblantout a ra Mari  
Evit ho dioual oll  
Bea bet savet he zy  
Var torguen Remengol.

C'hoec'h oute a zougue  
Eul lestr var ho diouskoa  
Hac ughent endro deze  
A ie en eur gana :  
« Gloar d'ar Stereden vrillant  
« A gundu var ar môr,  
« E kreis fulor an tourmant  
« Bugale an Arvor !.... »

Alies hon deus guelet  
'Vit enori Doue  
Ar vrezellerien renket  
Ha fusuillou gante ;  
Soudard eur roue marvel  
Mesk soudardet ar groas  
Ha banielou ar bresel  
Varlerc'h re ar Sænt bras.

Mæs kaëra tra da velet  
Eur groas ha relegou  
D'ho dioual, evel ælet,  
Diou renk bugaligou,  
Ha skeudussoc'h 'vit perlès,  
Merc'het yaouank e guen



A zindan sel ar Verc'hès  
Pa vent eus he douguen.

Dre ar fourdelisennou  
Uz ar Verc'hès laket  
Evel ar steredennou  
Uz al loar arc'hantet  
Guelet 'rit-hu o luyel  
E mesk ar soudardet  
E dorn hon Escop santel  
He vas-kroçz alaouret.

Varlerc'h, endro d'an ilis  
Oll boblou Breiz-Izel  
Evel eur parkad guinis  
Ijet gant an avel,  
Ha disholo ho fennou  
Gante eur chapelet  
Gante oll guialennou  
Merk ar belerinet.

Neuse 'neb a selaouje  
Moues kleïer Remengol,  
A dra zûr ho entendje  
O lavaret d'an oll :  
« Ia, Gralon, Gralon, Gralon,  
« Güir e poa lavaret  
« Ama 'teu tud a galon,  
« A bevar c'hora ar bed!!!.... »

#### IV. An Distro.

Kenavo, pardon brudet  
Kenavo dit crec'hen  
A bini ar fei 'ziret  
'Vel deus eun irienen.



Kenavo ar veach kenta  
Ma teufomp adare  
D'an ilis bursudus ma  
Da veuli Mam Doue.

Kenavo etrezomp-ni  
Kenavo ar c'henta  
Ma teufomp da bardoni  
Adare d'al lec'h ma,  
Mæs ma teufer d'hor guervet  
'Vit difen hor Mam-Bro  
Difen al lesen santel,  
Kerkent ni n'em gavo!!...

Ni deui adare ama  
Da guerc'hat ar baniel (\*)  
Hon deus laket en deis-ma  
E treid hor Mam santel,  
Gant hor baniel e c'hafomp  
Keit c'hoas ua ma zomp bet,  
Gant hor baniel e trec'hfomp  
C'hoas hon enemiet!!...

Evelse e kimia  
E gueret Remengol,  
Ar belerinet a fe  
Deut a Sebastopol,  
Pa deu an nos da asten  
Ebars er firmamant,

---

(\*) Potret yaouank Breiz-Izel a ra vœu er bloavez ma tennont d'ar billet, da zouguen, e procession, da bardoniou Remengol, ar banielze, hanvet *Baniel ar Brezel*, darn, evit caout eur billet mad, darn-all evit goulen ar c'hraçz da zont d'ar guer eus an arme, e beo ha divac'hain. Pa vent distroet eus an arme, pe divar ar môr, hen dougont adare en ho dillat soudard, evit trugarecat an Itron-Varia Remengol.



igass ar vrumen  
E saë gaër diamant.

D'ar mare se ar botret  
Distro e korn an tân,  
Ar meder hac ar merc'hed  
A c'hortose ho c'hoan;  
Neuse en tieguechou,  
An dud côz a gomze  
Demeus an oll bursudou  
Voa gouelet en deis-se....

Tud yaouank a lavare  
Ar pez ho doa klevet  
En ilis deus ar beure,  
Deus an nos er véred.  
Hac oll kement a voa bet  
E pardon Remengol,  
'Gomze deus ar soudardet  
Ha deus Sebastopol.

Etoues ar belerinet  
Hac an oll yaouank's  
Hon deus guelet soudardet  
O pedi en ilis.  
Bea 'hint tud a galon  
E kreis tân ar bresel,  
Ha tud a feiz er pardon,  
Bugale Breiz-Izel!!!...





---

---

## PEDEN

### ***D'AN ITRON-VARIA REMENGOL.***

---

Var ton : *Gourc'hemenou Doue.*

O pezit sonj Guerc'hès Vari,  
N'eus bet biscoas clevet hini,  
O lavaret 've et da gol,  
Nep a bed Guerc'hès Remengol.....

Samet hon gant va fec'hejou,  
Va daoulagad a scuil daëlou,  
Keus am beus da vea offanset,  
Va Doue ho mah biniguet.

Gant fizianç en ho madeles  
Rouanes ar Sænt, an Ælès,  
E teuan laouen d'ho pedi,  
Rac c'houi eo ar Verc'hès Vari.

Guerc'hès Remengol, me ho pet,  
Va diouallit eus ar pec'het,  
Hac astennit ho torn santel,  
Da souten, bepret, ho buguel.

Pa zono va heur diveza,  
Pa rankin kuitat ar bed-ma,  
Kassit ac'hanon da repos  
Ganeoc'h e joa ar Barados.